

ADRIEN DE CARNÉ

BARZ AN ARVOR



Kristen ha Breizad da virviken

TARSIZIUZ

Myster kristen enn eun Arvest



BREST

4 — MOULLEREZ RU AR C'HASTEL — 4

1912

891
682


TARSIZIUZ

Myster kristen enn eun Arvest

D'AN AOTROU GRALL, PERSOUN GUITALMEZE.

*D'ehoc'h e kinnigan, a greiz va c'haloun, buez
vurzduduz ar merzer iaouank Tarsiziuz. N'euz ken
hano enn-hi nemet euz a Zakramant an Aoter,
m'ho peuz kement a garantez evit han.*

*Goulen a ran, digan-ehoc'h, enn deiz ma, diou
vennoz, unan d'al levrik keaz, eun all d'an hini en
deuz her savet.*



ARGUMENT

Dioclétien et Maximien ont ordonné une persécution contre les chrétiens. Pancrace et Rusticus, jeunes chrétiens aspirant au martyre, déchirent le décret affiché devant le tribunal des empereurs. Ils sont jugés, séance tenante, par le Préfet de Rome, et condamnés à combattre contre les lions, dans le cirque. Par une faveur souvent accordée aux martyrs, ils viennent, dans les catacombes, prendre un dernier repas avec leurs frères. Quand ils sont partis, le prêtre Dyonisius se préoccupe de leur faire parvenir le saint viatique. Le petit acolyte Tarcisius demande, avec supplications, à être chargé de cette auguste mission. Le prêtre hésite devant le jeune âge de l'enfant, mais finit par céder à ses instances. Tarcisius, se rendant aux prisons, se laisse martyriser plutôt que de livrer aux païens le corps sacré du Seigneur.

Ce petit drame ne demande pas de mise en scène compliquée. Il suffit de vouloir bien supposer que ses trois parties se passent, successivement, devant le tribunal impérial, dans les catacombes et sur la voie Appienne (1).

(1) Les personnages sont les mêmes que ceux de *Fabiola*, le célèbre livre du cardinal Wiseman,

TUD AR MYSTER :

TARSIZIUZ, 11 pe 12 vloaz }
PANKRAZ, 14 — } kristenien o zri.
RUSTIKUZ, 15 — }
LUSIAN, belek kristen, koz-braz, 90 vloaz.
DIONISIUZ, belek kristen.
SEBASTIAN, ofiser kristen, o servicha an impa-
laerien.
TERTULLUZ, prefed kear Rom.
FULVIUZ, e ofiser kenta.
KORVINUZ, mab ar Prefed.
HERMANN, soudard divroad, *ruz flamm e varo hag*
e vleo.
MARSELL, skolaer, 13 vloaz.
Eur skolaer.
Tri ofiser, oc'h heulia prefed Rom.
Daou zoudard Rom.
Eur ribitaill skolaerien.
Eun toullad kristenien.

*An dra ma a dremen e Rom, e tro ar bloaz 303,
goude donedigez Hor Zalver.*



KENTA LODEN

Lez-varn an impalaerien

*Daou vank, an eil a gleiz, egile a zeou. Eur peul
hoat, ma stager out-han paperiou al lezenn. A
zeou, eur gador-vreac'h huel ha brao, evit prefed
Rom.*

KENTA DIVIZ

KORVINUZ, FULVIUZ

FULVIUZ

Petra a ouzoud te a nevez, Korvinuz ? Daoust ha
ne zeuio ket aman an impalaer Dioklesian ?

KORVINUZ, *eur paper gwenn rollet gant han*

Ne zeuio ket. An impalaer en deuz kalz a guden-
nou da ziluia gant ar brezel a reer a enep tud gouez,
e bro Azia. Dioklesian a jomo enn e balez hirio a
hed an deiz. Mes n'hor beuz tamm ezomm ebed
anez-han.

FULVIUZ

Me a grede d'in ez oa mall braz gant-han dont
aman da rei eur gourc'hemenn nevez diwar benn
ar gristenien.

KORVINUZ

Roet en deuz, avad, ar gourc'hemenn ze, ha me
eo am euz savet al lezenn nevez. Ar paper ma eo.

FULVIUZ

Mad kenan ; al lezenn-ze, mar d'eo bet skrivet
gan-ez, a zo skrivet mad, a gav d'in. Te zo lemm
da spered.

KORVINUZ, *lorc'h enn-han*

Me her c'hredfe a-walc'h, dioc'h a leverer.

Mes ne jomimp ket pell hep gouzout ha labour vad eo am euz great. Setu va zad, Prefed Rom, o tont, e ofiserien gant-han.

Her lakaat a raimp da varner war gement se.

II DIVIZ

KORVINUZ, FULVIUZ, TERTULLUZ, HERMANN,
OFISERIEN

Hermann a ia da azeza pelloc'h war eur bank.

FULVIUZ

Ni ho salud gant ar brasa doujans, aotrou Prefed.

TERTULLUZ

Ne zeuio ket hirio an impalaer d'al lez-varn.
Deuet ouñ, euz e berz, da zerc'hel e leac'h.

KORVINUZ

D'e-hoc'h eo, neuze, e tlean me diskouez al lezenn nevez am euz savet, hervez gourc'hemenn Dioklesian, a enep ar gristenien. *O rei e baper.* Setu hi, va zad, mar plij gan-e-hoc'h he lenn.

TERTULLUZ *oc'h azeza war e gador, hag o lenn*

Ni, Dioklesian ha Maksimian, impalaerien ar bed, aotrounez holl c'hallouduz, miptien ar brasa doueou, a ro da anaout da bobl Rom ha da vroa-dou all an douar, eul lezenn nevez savet gan-e-omp.

Da genta : N'euz doueou nemet re Dioklesian mab karet an doue Jupiter, ha re Maksimian, mab karet an doue Erkul.

D'an eil : Ar re a zo enn eun tu gant an hini a reer anezhan Jezuz-Krist, o lavaret ez eo doue

hennez, ar c'haouiaded ze zo enebourien touet an impalaerien.

D'an trede : Gourc'hemennet stard eo, d'an holl, klask ar gristenien, redek war o lerc'h, kregi enn o hag o c'has dirak kador ar barner.

D'ar pevare : Ar gristenien, pa vezint paket, ma falvezo d'ez-o, a galoun vad, devi ezans dirak hon doueou, e vezo roet d'ez-o, raktal, o frankiz hag o buez. Ar re ne fello ket d'ez-o, n'euz fors piau e vent, goaz, maouez, bugel, koz pe iaouank, mestr pe vevel, paour pe binvidik, a vezo barnet d'ar maro ha lazet evel chas.

D'ar pemped : Prefed Rom, e ofiserien hag e varnerien, a ranko lakaat al lezenn da vont enn dro hag an dud da zenti ouz-omp. *Da Korvinuz.* A zoare vad ec'h euz savet al lezenn-ze, Korvinuz. Gopreet mad e vezi. *Rei a ra ar paper da Korvinuz.*

KORVINUZ, *o saludi*

Ho trugarekaat a ran, va zad.

TERTULLUZ

N'hor beuz ket a amzer da goll. Fulviuz, deuz d'am zelaou. Laka da staga skrid al lezenn nevez oc'h kement moger a zo e kear.

Hag ar paper ze, ma z'eo bet skrivet al lezenn war-n-han evit ar weach kenta, stag anezhan ouz ar peul ma, dirak lez-varn an impalaerien.

Fulviuz a stag ar skrid ouz ar peul. Hermann ! Hermann ! *Hermann, azezet atao war e vank, ne finv tamm.* Hermann ! Peleac'h ema hennez ta ?

Hermann a zav hag a zeu.

HERMANN

Emaoun aman, aotrou Prefed.

TERTULLUZ *o c'hourdrouz Hermann*

Te zo bouzar ta, o choum hep respount pa vezez galvet ? Klevet a rez ? *Hermann a jom displach enn e za.* Lavar ta !

HERMANN

Ia, aotrou Prefed.

TERTULLUZ

Ne ket re abred. *O tiskouez d'ez-han ar paper staget ouz ar peul.* Gwelet mad a rez ar paper ze ? Te a jomo aman hep pellaat an distera diout-han. Te zo lekeat da deurel ar brasa evez out-han.

Va c'hlevet ec'h euz mad ? *Hermann ne finv ket ; ar prefed a ia drouk enn-han.* Pegen diot eo an azen ma ! Lavar d'in ar pezh am euz gourc'hemen-net d'id.

HERMANN

Choum dalc'hmad tost d'ar paper staget ouz ar peul.

TERTULLUZ

Mad ; ha taol evez, pe da groc'hen a baeo ker.

HERMANN

Ia, aotrou Prefed.

TERTULLUZ, *da Gorvinuz ha da Fulviuz*

Bremaik al lez-varn en em zalc'ho aman.

E teuin enn dro abalamour da ze. *An holl a ia kuit nemet Hermann.*

III DIVIZ

HERMANN, *e unan*

Goude beza kroget er bank, ez a d'her lakaat tost d'ar peul. Azeza a ra, e zremm warzu an dud.

Pebez micher inouuz d'in ! Ha ne ket eun truez eo lakaat eun den da zellet ouz eur c'hoz peul koat staget out-han eur c'hoz tamm paper ? Ha petra a ra d'in Erkul, Jupiter, an impalaerien, an ofiserien, ar varnerien ha n'ouzpéd a ganfarded all eveldo ? Goap a ran mad anez-o, me, hag e tiga-

san d'ez-o, a bouez va fenn, mil ha mil foultraden euz ar re gaera.

Sellit ta ! Daoust ha n'oan ket, me, eurusoc'h, ha kalz muioc'h zoken, p'edoun pell, e broiou an hanter-noz ma z'oun bet ganet enn o ? *O tenna euz e zac'h eur goz voutaill bri.*

Pegouls ez in me di adarre, da c'haloupat, evel kent, war lerc'h ar bleizi hag an ourzed ?

N'oun ket evit her lavaret. *Gant eur vouez flour o sellet oc'h e voutaill.* Gwella tra zo m'emaoc'h gannen, boutaillik leun a win ardant kerez, a laka va c'haloun baour d'en em laouenaat peb enn amzer. *O poket d'ar voutaill.* Na c'houi zo kaer, va mignounezik ! *O poket adarre.* Na c'houi zo karet ! *Oc'h hejal ar voutaill tost da doull e skouarn.* Ha pebez plijadur eo, klevet ar vouez dudiuze a gan enn ho kofik !

Eva a ra o lakaat gouzouk ar voutaill enn e c'hinou. Nag hen zo mad ar gwin ardant ! *O sellet warzu ar meaz, endra m'ema Rustikuz, Pankraz ha Tarsiziuz o tont.* Petra ta ? Piou eo ar re ze ?

Eva a ra. Tud iaouank ; bugaleigou ; eur ribitaill skolaerien n'eo ken !

IV DIVIZ

HERMANN, *azezet atao, PANKRAZ, RUSTIKUZ*
TARSIZIUZ

PANKRAZ

Eur pennad brao a amzer a zo d'eomp, abarz distrei d'ar skol. Azezomp war ar bank se. *An tri a azez war eur bank, da ziaraok an teatr enn tu all d'ar bank m'ema Hermann war-n-han.* Pankraz en em laka e kreiz, Rustikuz ha Tarsiziuz an eil a gleiz, egile a zeou.

RUSTIKUZ

Eun ebad eo, Pankraz, ober aman eun abaden-nik kaozeal.

TARSIZIUZ

Ia da, eun ebad euz ar re zuziusa. Pa vez Pankraz em c'hichenn, eur wir blijadur a vez ive em c'haloun, evel ma ve Pankraz va breur e ve.

PANKRAZ

Arabad eo d'id beza souezet gant kement se Tarsiziuz. Me a gar ac'hanoud ive evel va breurik. Ni zo breudeur holl etrezomp, o veza ma z'omp gwir gristenien.

RUSTIKUZ

Setu ar pezh a lavar ive Lusian, hor belek koz. Hennez eo en deuz va badezet.

PANKRAZ

Mad. Ne vadezo krouadur ebed diwar-vreman. Soudarded an impalaer o deuz kroget enn-han, daoust d'ez-han da veza paket e zek vloaz ha pevar-ugent.

TARSIZIUZ

Ha perak ta ?

PANKRAZ

War zigarez ma z'eo kristen, ha netra ken. Hirio e vezo barnet, ha merzeriet kerkent goude.

TARSIZIUZ

Petra eo beza merzeriet ?

PANKRAZ

Eur merzer eo an hini a varv etouez ar poaniou ar re vrasa en eur c'houzanv evit hano Jezuz-Krist. N'euz maro ebed a ve enorusoc'h. N'euz hini ebed, ken nebeud, a ve dudiusoc'h da Zoue. Evidoun me, avad, a c'houlenn stard bemdez digant-han ma varvin merzeriet.

RUSTIKUZ

Ha penaoz e respount Doue d'id-de ?

PANKRAZ

O lakaat noz deiz em c'haloun ha dirak va daoulagad skouer va zad karet, en deuz roet e c'hoad evit ar gwir feiz, hag a oa Kintinuz e hano. Da zerc'hel sonj anez-han, eun dra vihan n'em euz ken. Mes talvoudusoc'h kalz eo d'in eget eun tenzor leun a berlez fin.

TARSIZIUZ

Petra eo ?

PANKRAZ, o tiskouez eur voestlik aour a zo a istribill gant eur jadenn aour oc'h e c'houzouk

An dra ma eo. Ar voestlik venniget se a zo ennhin eun tammik lienenn bet glebiet gant ar goad a rede euz a c'houli marvel va zad, deiz e verzerinti. Eur garantez dispar am euz evit an draik keaz se.

RUSTIKUZ

Her c'houmpren a-walc'h a reomp.

PANKRAZ

Ar goad a zo o virvi em c'hreiz a zo an hevelep goad gant an hini a viran er voestlik se, gant an hini bet skuillet evit gloar Doue. *Poket a ra d'ar voestlik.*

RUSTIKUZ

Plijet gan-ez ma rofen me ive eur pok d'ez-hi. *Rustikuz a bok d'ar voestlik.*

TARSIZIUZ, o pidi Pankraz

Ha me ive, Pankraz, ha me ive ! Az pidi stard a ran. *Pankraz a ro da boket ar voestlik da Tarsiziuz.*

PANKRAZ

Plijet gant va zad merzer ma teufe d'in ha d'e-hoc'h ho taou, eur galoun henvel oc'h e hini, da vervel evit Doue, ma ve red.

Hermann, c'hoant kousket gant-han, a zigor frank e c'hinou, en eur leuskel eur vlejaden. An tri bugel a dro o fenn warzu Hermann.

TARSIZIUZ, o c'hoarzin goestad

Sell ta ! Piou eo hennez ? Nag hen zo divalo, ne ket ta ?

PANKRAZ

Ro peoc'h ! hennez zo eun den kriz, eun den fallakr. Eur zoudard eo o servicha an impalaerien.

RUSTIKUZ

Hen a zo ruz flamm e varo hag e vleao. Hen a zo e zaoulagad hanter-zerret. *Hermann a ra trouz adarre o tic'henaoui.*

TARSIZIUZ

Gwall c'hoant kousket en deuz, a gav d'in. *Hermann a gousk. Sellit ! Sellit ! Kousket a ra. Pankraz a zav.*

PANKRAZ

Petra ta ema hennez oc'h ober azezet aze ?

Deomp da welet. *Pankraz a ia hag a lenn, hep lavaret ger, al lezenn staget ouz ar peul.*

RUSTIKUZ azezet atao war ar bank, *Tarsiziuz gant-han*

Ar zoudard se, war va mennoz, a zo bet lekeat aze da deurel evez ouz eul lezenn bennag staget ouz ar peul ze, evel ma reer atao.

TARSIZIUZ, o vousec'hoarzin

Feiz ! eun evesiad fall eo, o kousket evelse.

PANKRAZ o tont enn dro

Rustikuz ! eul lezenn nevez eo a zo aze, eul lezenn griz ha difeiz a enep ar gristenien. Gourc'henn a ra ma vezint paket ha barnet d'ar maro.

RUSTIKUZ, o sevel

Ha neuze, Pankraz ? Ne ket ar weach kenta eo ma fell d'ez-o, an impalaerien, poania ar gristenien.

PANKRAZ

Gwir eo. Mes ne ket hep ken kement se.

Skrivet eo ive n'euz doueou nemet re an impalaerien.

Ar paper ze, Rustikuz, a nac'h hor Zalver beniget, o lavaret ne ket eun Doue eo ez eo.

RUSTIKUZ

Traou heuzuz an holl draou ze ! Ni, ar gristenien, ne c'hellomp ket gouzanv dismegansou er c'hiz se diwar-benn hon Doue.

PANKRAZ gant nerz

Rustikuz ! red eo d'eomp regi ar c'hoz tamm paper ze. Ar zoudard a zo kousket. Mar teu da zihuna enn eun taol, lazet e vezimp raktal hon daou gant-han. N'euz fors ! Enn hano ar C'hrist, deomp Rustikuz !

Pankraz ha Rustikuz a ziframm ar paper dioc'h ar peul hag her rog a dammou.

RUSTIKUZ, o sellet oc'h ar meaz

Re zivezad eo. Paket omp. Fulviuz en deuz hor gwelet a bell. Dont a ra o redek ; ofiserien a zeu ive, tu ma tu hont.

PANKRAZ

Tarsiziuz, kea kuit buhan.

TARSIZIUZ

Me fell d'in choum gant-e-oc'h.

PANKRAZ, krenv e vouez

Kea kuit ! Kea da lavaret d'ar belek ar pezh a c'hoarvez ; warc'hoaz e varvimp. Enn hano hor Zalver, kerz buhan. *Tarsiziuz a ia kuit.*

V DIVIZ

HERMANN *o kousket atao*. PANKRAZ, RUSTIKUZ,
FULVIUZ, TRI OFISER

FULVIUZ

Paket mad oc'h, paotred fall. Ha n'ouzoc'h ket,
marteze, e c'hellit beza barnet d'ar maro, o veza
great fae evelse euz a lezennou an impalaerien ?

RUSTIKUZ

Her gouzout a reomp.

FULVIUZ

Ha c'houi oc'h her gouzout, ho peuz kredet ober
an torfed se koulskoude ?

PANKRAZ

Regi eun tamm paper skrivet war-n-han komzou
difeiz a enep hon Doue, ne ket eun torfed eo ez eo,
mez eun dra enoruz meurbed.

FULVIUZ

Mad. Ho c'hoari gaer zo bet great e poent hag
enn amzer, rak dizale ar Prefed a zeuio aman.
Barnet e viot gant-han.

PANKRAZ

Her gouzout a reomp.

VI DIVIZ

HERMANN *kousket atao*, PANKRAZ, RUSTIKUZ,
FULVIUZ, TERTULLUZ, AN TRI OFISER, DAOU
ZOULDARD, LUSIAN. *An daou zouldard a zigas
Lusian da veza barnet. Tertulluz a azez war e
gador-varn.*

TERTULLUZ

Fulviuz, ar re a dle beza barnet enn dro ma, ped
zo anezho ?

FULVIUZ

Tri, aotrou Prefed, eun den koz-braz ha daou zen
iaouank. An hini koz eo a zo bet paket da genta.

TERTULLUZ

Digasit dioc'htu an hini koz diraz-oun, neuze.
Lusian a ia. Lavar d'in da hano ha da vicher.

LUSIAN

Lusian a reer ac'hanoun, ha ne ket eur vicher eo
em euz, mez eur garg, hag hi ar gaera ma c'hellfed
kaout er bed ma.

TERTULLUZ

Pehini ?

LUSIAN

Ar garg a vele. Hag an Doue ma z'oun me e
velek da viken, n'em euz an distera aoun evit
lavaret e hano a vouez krenv. An Aotrou Jezuz-
Krist eo. An doueou all n'int nemet falz doueou.

TERTULLUZ

Ma leverez adarre drouk komzou a enep hon
doueou ni, gourc'hemenn a rin toulla da deod gant
eun houarn ruziet oc'h an tan.

LUSIAN

Ha pa ve devet a bez va zeod, daoust ha ne
c'hellfen ket evelato meuli ha pidi Doue gant va
spered, enn oun va unan ?

TERTULLUZ

Lez da ober ; me a viro ouzid da bidi ha da veuli
n'euz fors piou. Fulviuz, galvit an daou gristen
all. Pankraz ha Rustikuz a ia dirak kador ar
Prefed.

FULVIUZ

Setu i o daou, aotrou Prefed. Ar re ze o deuz

disprizet an impalaerien o strinka a dammou al lezenn nevez.

TERTULLUZ *da Bankraz*

Piou a reer ac'hanoud ?

PANKRAZ

Pankraz, mab Kintinuz, bet merzeriet.

TERTULLUZ

Te eo hag ec'h euz roget skrid al lezenn ?

PANKRAZ

Me eo, hag her lavaran a vouez huel.

TERTULLUZ

Nebeutoc'h a foug, emichans, a vezo enn-oud warc'hoaz, pa vezi barnet da stourm a enep al leoned hag an tigred, pa vezo draillet da gorf gant-o, evel m'ac'h euz roget, te da unan, lezenn an impalaerien.

PANKRAZ

Ma traillont va c'horf, ne zraillint ket va ene.

TERTULLUZ, *drouk enn-han*

Penn kalet ma z'oud ! Lavar ta ! Ha n'oa nemet oud o freuza an traou evelse ?

RUSTIKUZ

Freuzet em euz ive, aotrou Prefed, ha dre ze em euz gounezet eun enor ker braz hag hini Pankraz. Ar pezh en deuz lavaret d'e-hoc'h, me her lavar ive.

TERTULLUZ, *da Fulviuz*

Penaoz ta, Fulviuz, o deuz gellet an daou ze ober kement se ? N'oa den ebet o tiwal ta, neuze ?

FULVIUZ

Eo, aotrou Prefed, ar zoudard Hermann oa bet lekeat.

TERTULLUZ

Peleac'h ema hen ?

FULVIUZ, *o welet Hermann kousket atao.*

Foultr Jupiter ! Kousket eo ! O tihuna Hermann hag oc'h e gas dirak ar Prefed.
Setu hen, aotrou Prefed.

TERTULLUZ, *rust e vouez da Hermann*

Deuz aman, koll bara ; daoust ha n'ec'h euz ket gwelet ar re ze o tiframma al lezenn ?

HERMANN, *o choum strafillet neat*

Al lezenn ?

TERTULLUZ

Ia. Petra a rez te abaoe ar mintin ma ?

HERMANN

Kousket. Pa vezan skuiz, e kouskan.

TERTULLUZ, *o c'hoarzin iud*

Ha, ha ha ha ! Kousket ? mad eo. Me az lakaio da gousket da viken. Kent na varnin an tri ze, eur varnedigez all am euz da zougen.

An hini a vez great Hermann anezhan a zo eur zoudard fall, disleal ha digaloun en deuz lezet torfederien gristen da regi ar pezh a oa bet great gant an impalaerien. Barn a reomp anezhan da veza lazet hirio a daoliou kleze.

HERMANN *o wela*

Ho pet truez ouzin, aotrou Prefed.

TERTULLUZ

Truez ebet ; kea kuit dioc'htu. Soudarded, taolit

anezhan er meaz. *An daou zoudard a ia er meaz, Hermann gant-o.* Ha breman, hastomp affo gant ar re all. *O komz out-o.* Awalc'h eo gant an holl draou diskiant ho peuz glabouzet d'in da genta. Eun truez braz am euz ouz-oc'h, iaouank flamm evel ma z'oc'h. N'oc'h ket peur gollet c'hoaz, daoust d'ho torfed skrijuz.

An dud iaouank, a weachou, a zo skanv o spe-red.

Rei a rin d'e-hoc'h ho puez, mar fell d'e-hoc'h devi ezans dirazoun enn hano an doue Jupiter.

PANKRAZ

Ni a zo gwelloc'h ganeomp gouzanv mil maro kriz kentoc'h eget devi ezans dirak eur goz skeudenn m'ema an drouk spered kuzet enn-hi.

LUSIAN HA RUSTIKUZ, *a unan*

Barnit ac'hanomp da vervel.

TERTULLUZ, *kounnar enn-han*

Ne ket diez : Ni, Prefed Rom, enn hano sakr Dioklesian ha Maksimian, a zoug hor barnedigez a enep ar gristenien Lusian, Pankraz ha Rustikuz.

Ar c'henta a zo savet gant-han c'hoant da ziskar brasa douéou kear Rom. An daou all o deuz diframmet lezennou mistri ar bed, hag oc'hpenn ec'h ansavont o zorfed gant eur foug e zispar.

Rak se, hervez ar galloud hor beuz a berz an impalaerien, gourc'hemenn a reomp ma vezo an tri c'hristen aheurtet ze lekeat da stourm, war-c'hoaz, a enep al leoned, dirak an holl bobl.

LUSIAN, PANKRAZ, RUSTIKUZ, *a unan*

Gloar da Zoue gallouduz ar gristenien !

EIL LODEN

Ar Pred-boued diveza

Bankou ha kadoriou. Eun daol vraz awalc'h.

KENTA DIVIZ

DIONISIUZ, TARSIZIUZ, *azezet o daou tost d'an daol*

DIONISIUZ

Lavar d'in me, va c'hezik, penn da benn, ar pezh ac'h euz gwelet dirak lez-varn an impalaer.

TARSIZIUZ

Eaz eo. Pankraz ha Rustikuz, goude beza lennet al lezenn, a rogaz anezhi a grenn. Paket e oent neuze gant soudarded. Pedoun eno, me, glac'haret neat gant se, Pankraz am c'hasaz kuit o lavaret : Tarsiziu, kea buhan da rei da anaout d'ar belek ar pezh a c'hoarvez.

Ha me a joume. Kerz buhan ta, emezhan, her gourc'hemennan d'id. Ha me enn hent neuze avad.

DIONISIUZ

Mad ec'h euz great. Mall braz oa gant-o ez afez, rak n'euz mar ebet, Tarsiziu. Warc'hoaz, d'an divezata, an daou wir gristen ze a vezo merzeriet.

TARSIZIUZ

Pankraz en deuz her lavaret ive.

DIONISIUZ

Red eo d'eomp ober ar gwella evit rei nerz d'ez-o

hag o frealzi, dreist holl enn eur gas d'ez-o, mar gellomp, o c'houmunion ziveza.

II DIVIZ

DIONISIUZ, TARSIZIUZ, SEBASTIAN

SEBASTIAN

Mil bennoz Doue war-n-oc'h, Dionisiuz.

Eur c'hloar nevez a zo o skedi war-n-omp. Pankraz ha Rustikuz zo bet paket gant soudarded Dioklesian.

DIONISIUZ

Tarsiziuz en deuz digaset ar c'helou ze d'in.

SEBASTIAN

Prefed Rom en deuz o c'hondaounet da veza strinket e toull al loened gouez. An traou a ielo enn dro buhan, a gav d'in. Ez euz e kraou al loened tri zigr ha pevar leoun euz ar re grisa, ha n'o deuz debret tamm tri dervez zo.

DIONISIUZ

Ha petra a ouzoud, Sebastian, diwar benn hor mignouned ? Daoust ha n'en deuz ket Prefed Rom aotreet d'ez-o, hervez ar c'hustum, dont aman da zribi ganeomp evit ar weach diveza ?

SEBASTIAN

Prefed Rom en deuz roet an aotre. N'oa ket, gwir eo, evit e zinac'ha, Dionisiuz. A bep amzer, an impalaerien, ar re grisa zoken, o deuz roet an aotre ze. Bremaik dioc'htu, Pankraz ha Rustikuz en em gavo aman, Lusian gant-o.

DIONISIUZ

Petra a leverez ? Lusian zo bet paket ive ?

SEBASTIAN

Paket ha barnet, war zigarez m'edo o vont da ziskar doueou Rom. Pebez diotachou !

DIONISIUZ o vouse'hoarzin

Ugent vloaz zo, ha muioc'h zoken, ma c'houlenn bemdez Lusian digant an Aotrou Doue beza merzeriet.

SEBASTIAN

Mad. E bedenn zo selaouet. Stourm a raio war-c'hoaz, Pankraz ha Rustikuz gant-han, a enep al loened.

DIONISIUZ

Ha ni, Sebastian, ha ni ? Pegouls e teuio d'eomp ive eun enor ken dispar ?

SEBASTIAN

Pa blijo gant an Aotrou Doue. *Moueziou er meaz.*

DIONISIUZ

Emaint aze, Sebastian ; kea da zigeri, me az ped. *Sebastian a ia.*

III DIVIZ

DIONISIUZ, TARSIZIUZ, SEBASTIAN, LUSIAN, PANKRAZ, RUSTIKUZ, EUN TOULLAD KRISTENIEN.

LUSIAN

Madelez hor Zalver, Dionisiuz, he deuz dibabet ac'hanomp, Pankraz, Rustikuz ha me evit skuilla hor goad war-c'hoaz. Plijet gan-ez, Dionisiuz, rei da vennoz d'eomp. *An tri en em strink war o daoulin.*

DIONISIUZ, oc'h astenn e zourn

Doue r'ho pinnigo, kristenien galounek. Goulenn a ran, a greiz kaloun, digant an Dreinded Sakr, ma tigasao d'e-hoc'h eun nerz krenvoc'h eget hini

al leoned. Savit. *Da Darsiziuz*. Kempenn an daol, Tarsiziuz ; laka war-n-hi eun douzier wenn, bara, boued ha dour fresk. *Tarsiziuz a ra.*

LUSIAN

Dribi a raimp evit ar weach diveza er bed ma.

Doue eo hen e unan hag a vezo warc'hoaz hor magadurez ni da viken. *Oc'h astenn e zourn a uz d'an daol*. Plijet gant Doue binniga ar boued a ro d'e zervicherien baour. Azezomp holl. *An oll a azez. Dionisiuz a laka Lusian da azeza e kreiz ar re all. An holl a zebr.*

DIONISIUZ

Eur sonj brao am euz, Lusian, ar sonj euz koan ziveza an Aotrou Doue, deiz-iaou gamblid, p'edo e kreiz e ziskibien araok mervel evidomp.

Te zo, hirio, eur wir skeudenn anezhan. Te zo belek evelldhan ; merzer evelldhan ive e vezi. Da c'hloar n'he deuz ket he far.

LUSIAN

Da bedennou a c'houlennan digan-ez, Dionisiuz, rak n'em boa ket gounezet eun enor ker braz hag an hini am euz.

SEBASTIAN

Ne ket d'e-hoc'h eo da c'houlenn hor pedennou. D'eomp ni eo da c'houlenn ho re.

Warc'hoaz ho tri e viot sent er baradoz ; eleac'h ni, pec'herien baour war an douar, a vezo red d'eomp ho skoazell. An Aotrou Doue n'eo ket bet fellet d'ezhan, bete vremen, e vijen me merzeriet ive. Glac'haret neat oun war gement se.

PANKRAZ

Bezit laouen, Sebastian. Ni zo sklerijennet hor spered gant sklerder ar re a zo o vont da vervel. Ni hon daou, Rustikuz ha me, n'euz nemet eur

pennad, a gomze ac'hanoc'h. Kurunen ar verze-rinti a vezo lekeat hep dale, war ho penn.

SEBASTIAN

Lakaat a rez va c'haloun da dridal gant levenez, mignounik.

RUSTIKUZ

Ho korf santel a vezo toulet a dennou bir, hag ho koad a vezo skuillet evit ar C'hrist, evel m'en deuz skuillet e hini evidoc'h.

SEBASTIAN

Ho kredi hag ho trugarekaat a ran, mignounedigou. Mirit sonj ac'hanoun pa viot digemeret e rouantelez an Aotrou Doue.

PANKRAZ

Hen ober a raimp, Sebastian. *An holl a zav.*

LUSIAN *o pedi*

Mil bennoz d'e-hoc'h, Doue mad meurbed oc'h euz roet d'eomp magadurez ar c'horf.

AN HOLL

Evelse bezet great.

LUSIAN

Poent eo mont kuit. Roet hor beuz hor ger e tistrofemp dizale d'ar prizoun. Deomp. *Dionisiuz a bok da Lusian, da Bankraz ha da Rustikuz. An tri a ia kuit.*

IV DIVIZ

SEBASTIAN, DIONISIUZ, TARSIZIUZ, *ar re all.*

DIONISIUZ

Pebez levenez zo enn-o ! O daoulagad a lugern gant gloar an envou. Mes n'eo ket peur echuet an

traou gan-eomp. Eun dra vraz a jom da ober c'hoaz. Sebastian, lavar d'in me hag e c'hellfe unan bennag mont d'o gwelet, o zri, er prizoun ?

SEBASTIAN

N'euz netra easoc'h. Me a vezo e penn ar zou-darded a daol evez ouz ar prizoun. Meur a weach, er c'hiz se, me, kristen, daoust d'in da veza ofiser an impalaerien, am euz roet digor d'ar re a felle d'ez-o gwelet ar brizounerien.

DIONISIUZ

Gwell a ze, rak me am euz ioul e vefe kaset d'ezo bara an env. Piou a falvezo d'ez-han dougen an tenzor ze, talvoudusoc'h eget an holl densoriou euz ar bed ?

TARSIZIUZ, *a vouez huel*

Me, va zad mad, me. Goulenn a ran stard ar c'hraz se digan-e-hoc'h.

DIONISIUZ

Ne c'hellez ket, va faour kezik, ne c'hellez ket. Re vihan oud, ha re iaouank.

TARSIZIUZ

Selaouit va fedenn, va zad. Roit d'in korf sakr va Zalver. Mar d'oun me bihan, gwell a ze ; va c'hefridi ne vezo nemet easoc'h a ze. An dud fall, mar teufen me d'en em gaout gant-o, ne raint stad ebed ac'hanoun dister evel ma z'oun. *Oc'h en em strinka war e zaoulin.* Ho pidi a ran gant holl nerz va c'haloun.

DIONISIUZ

Ema ar wirionez marteze gan-ez. Teurel evez mad a ri te, da vihana ? Anaoud mad a rez te talvoudegez dispar an dra zantel ze ?

TARSIZIUZ

Hen anaoud a ran evit ar gwella.

DIONISIUZ

D'id-de e roin, neuze, Tarsiziuz, korf hon Aotrou Jezuz, da zougen d'hor breudeur. Dalc'h sonj mad euz da gefridi. Emaoud o vont da veza kannad an Aotrou Doue. Brasa enor !

TARSIZIUZ, *gant nerz*

Korf santel va Zalver ne vezo tennet digan-en nemet tennet ne vefe da genta va c'haloun euz va c'hreiz.

DIONISIUZ

Mad. Deuz gan-en, paotrik benniget.



TREDE LODEN

Ar Merzer iaouank

An dra ma a dremen war ar ru, e Rom. Eur bank, enn eur c'horn.

KENTA DIVIZ

TARSIZIUZ o tont, e zaoulagad war zu an env
Eurusded an envou !... An elez n'eo ket ker braz
o levenez ha va hini me !... Moueziou, kriadennou
ha c'hoarzedennou er meaz. Eun toullad skolaerien
a zeu, o redek hag o c'hoari. Tarsiziuз a jom enn
e za.

II DIVIZ

TARSIZIUZ, MARSELL, AR SKOLAERIEN
EUR SKOLAER

Sellit, sellit ! paotred, Tarsiziuз eo. Ne fazian
ket ; hen eo. Deuz da c'hoari gan-eomp, Tarsiziuз.

TARSIZIUZ

Trugarez d'id, mignoun, mes ne c'hellan ket. Me
am euz eur gefridi euz ar re vrasa.

AR SKOLAER

Pa vez poent c'hoari, e c'hoarier. Deuz ganeomp.

TARSIZIUZ

Ne c'hellan ket ; her layaret am euz d'id.

AR SKOLAER

Choum a rankez. Ni a fell d'eomp. Ac'hanta ! da

zremm zo ken tenval hag hini eun den koz. Petra a c'hoarvez ganez, ta ?

MARSELL

Petra ? Ha n'her gwelit ket ? Eun azen gristen eo o tougen ar mysteriou. *An holl a c'hoarz a bouez penn.*

AR SKOLAER *oc'h ober goap*

Ar mysteriou ! Pebez chans yad d'eomp. Pell amzer zo em euz c'hoant da welet mysteriou ar gristenien. Allo ta ! Tarsiziuz, diskouez d'eomp an traou burzuduz se. Hast affo, ta ! *Ec'h en em lakeont holl da zacha ha da vounta Tarsiziuz.*

TARSIZIUZ

Ne rin ket. C'houi am lazo da genta. Gwel eo gan-en mervel.

AR SKOLAER, *oc'h ober goap*

Mervel ! mervel ! tao ta, pez didalvez a gristen ma z'oud.

MARSELL

Ha pa varfe ? Petra a rafe kement se ? Daoust ha n'en deuz ket an impalaer gourc'hemennet laza ar gristenien ? *Da Tarsiziuz.* Diskouez d'eomp, raktal ar pezh a c'halver mysteriou.

TARSIZIUZ, *a vouez huel*

N'her grin biken ! *An holl a sko gant Tarsiziuz kounnar vraz enn-o.* Tarsiziuz a gouez war an douar, e zaouarn kroazet atao war boull e galoun. *Sebastian a zeu o redek, hag a c'hourdrouz stard ar vugale.*

III DIVIZ

TARSIZIUZ *kouezet.* AR SKOLAERIEN, SEBASTIAN

SEBASTIAN

Ha n'oc'h euz ket a vez, bugale didruez, o skei

holl, evelse, gant eur paotrik keaz ? *Gourdrouz a ra.* It kuit, raktal, buhana ma c'hellot, bandenn vugale fall. *Ar vugale a ia pelloc'hik, Sebastian a red war o lerc'h.* Eur weach c'hoaz it kuit holl evit mad. *Ar vugale a ia kuit holl.*

IV DIVIZ

TARSIZIUZ, SEBASTIAN

Sebastian a ia da azeza war ar bank, Tarsiziuz gant-han enn e zivreach'h.

SEBASTIAN

Ha poan vraz ec'h euz, paotrik ? Lavar d'in ; me zo eur gwir vignoun d'id. *Tarsiziuz ne finv tamm.* Ha n'oud ket evit respount d'in ? breman n'ec'h euz ket ezomm da gaout aoun ; ar re fall zo eat kuit.

TARSIZIUZ *o tihuna eun tamm, klemmuz e vouez*

Ha c'houi eo Sebastian ? C'houi zo braz ho madelez. Eun enkreiz spountuz am euz... diwar benn... diwar...

SEBASTIAN

Diwar benn petra, mignounik ?

TARSIZIUZ

Diwar benn Korf Sakr... Jezuz... Ha n'eo ket eat... eat... gant ar re ze, da vihana ? *Sebastian a zistag daouarn.* Tarsiziuz a zo kroazet atao, hag a zigor eun tamm ar zae rusiet gant e c'hoad.

SEBASTIAN

Bez dinec'h, va c'hezik. Ema Korf Sakr an Aotrou Doue atao gan-ez. Her gwelet hag hen adori a ran war da galoun.

TARSIZIUZ

Brasa levenez ! Va gouliou ne reont mui poan d'in... O Jezuz ! fellet eo bet d'e-hoc'h choum...

gan-en... Bennoz ! Me... me hoc'h ador... ha breman... breman... e varvan !

SEBASTIAN

Petra ta ? N'eo ket, n'eo ket, ni a bareo da c'houliou. Ne varvi ket.

TARSIZIUZ, *e vouez o tinerza mui oc'h mui*

Eo, eo... Mervel a ran... Salver karet, kasit ac'hanoun... gan-ehoc'h... er... er baradoz. *Tarsiziuz a denn eun huanad hir hag a varv etre divreac'h Sebastian.*

SEBASTIAN

Her laza o deuz great. Peger kriz int ! Mes pebez maro santel ! *O sellet out-han.* E zremm zo laouen ha sioul. Doue ar verzerien, ho pezet truez ouz ar re o deuz her lazet.

V DIVIZ

SEBASTIAN, TARSIZIUZ *maro.* DIONISIUZ

DIONISIUZ

Petra zo, Sebastian, petra zo ? Daoust hag e ve Tarsiziuz klanv ?

SEBASTIAN

Beo eo, mez er baradoz ! Lazet eo bet gant eun toullad bugale griz.

DIONISIUZ

Bolontez Doue bezet great ! Ema eur merzer nevez o pidi evidomp. *O sellet oc'h ar bugel.* Nag hen a zo koant enn e gousk diveza ! Ha Sakramant an Aoter, Sebastian ? N'eo ket bet gwall gaset gant an dorfederien ze ?

SEBASTIAN

N'eo ket bet Dionisiuz. Ema atao Bara Sakr an

envou war galoun c'hlan ar merzer iaouank. Her c'hemeret a c'hellot digant-han enn hon ti, p'am bezo douget enn-han ar paour kezik. Ha ne gav ket d'e-hoc'h, Dionisiuz ?

DIONISIUZ

Eo, eo. Emaoun ive o vont dioc'htu war da lerc'h. *Sebastian a ia kuit, Tarsiziuz enn e zivreac'h.*

VI DIVIZ

DIONISIUZ, MARSELL

MARSELL

Gortozit eur pennad ; me ho ped a greiz kaloun.

DIONISIUZ

Perak ta, paotrik ?

MARSELL

Abalamour d'eun dra vraz. Ha ne ket c'houi eo belek ar gristenien ?

DIONISIUZ

Me eo. Petra a fell d'id ?

MARSELL

Ha n'oc'h euz ket gwelet aman, n'euz ket pell, eur paour keaz paotrik gwal gaset gant skolaerien ?

DIONISIUZ

Her gwelet em euz.

MARSELL, *nec'het*

Ha poan vraz en deuz ?

DIONISIUZ

N'en deuz mui. Maro eo.

MARSELL, *glac'haret*

O ! na pebez kalounad c'hlaç'har am euz, me, oc'h ho klevet. E touez ar skolaerien, unan anez-o en deuz roet d'an hini bihan an taol en deuz her lazet. *Oc'h en em strinka war e zaoulin.* Ha me eo, aotrou belek, me eo ar bugel kriz ha digaloun ze. Tarsiziuz, o koneza, en deuz sellet ouz-in, hag e zaoulagad a ioa enn-o eur vadelez dispar. War an taol, va c'haloun zo bet rannet, hag am euz skuillet daelou stank.

DIONISIUZ

Ha te zo braz da geuz neuze, da veza lazet Tarsiziuz ?

MARSELL

Braz, braz ! Mez eun dra all a ra muioc'h a boan d'in c'hoaz.

DIONISIUZ

Pehini ?

MARSELL

Ne c'hellan mui goulenn pardoun digant-han.

DIONISIUZ

Gwir eo, mes me, belek, enn hano Jezuz hag enn hano Tarsiziuz a well ac'hanomp, me a denno diwar-n-oud an droug ac'h euz great.

MARSELL *e zaouarn kroazet*

Na peger mad eo Doue ar gristenien ! eur sklerder nevez a zav em spered. Deuet eo euz daoulagad Tarsiziuz. Mar kredfen me, e lavarfen d'e-hoc'h ar c'hoant braz a zo o virvi em c'hreiz.

DIONISIUZ

Lavar.

MARSELL

Anaout ho Toue ha dont da veza kristen.

DIONISIUZ

Doue r'az pinnigo, breurik karet ; kristen e vezi.

VII DIVIZ

Sebastian hag eun toullad mad a gristenien a zeu

DIONISIUZ

An deiz ma, va breudeur, ne ket eun deiz a c'hlaç'har eo ez eo, mez eun deiz a levenez hag a c'hloar. Hor breurik keaz Tarsiziuz zo eat d'ar baradoz, hosti an douar bet merzeriet evit hosti an envou. Gwelet em euz e c'hoad glann, ruz war e zae wenn evel ma vije bokejou roz kemmesket gant lili. Mousc'hoarz an elez am euz gwelet o skedi war e c'hinou, endra m'edo e zouarnigou kroazet war boull e galoun da viret, beteg ar maro, Korf Sakr an Aotrou Jezuz. Pebez kentel v Rao evidomp ni, va breudeur ! Kemeromp da skouer ar bugel kalounek se. Karomp, evel-d-han, Sakramant an Aoter, roet d'eomp gant eun Doue a zo en em c'hreat den evidomp. Korf santel hon ealik karet a vezo douget ha beziet e bered Sant Kallist. Da c'hedal ma z'aimp d'hen dougen d'an iliz, kanomp a unan, gant holl nerz hor c'haloun, kantik Sakramant an Aoter.

KANTIK SAKRAMANT AN AOTER

War don anavezet mad : Kantik ar Baradoz.

AN HOLL a unan

Burzud ar burzudou !
Boued dudiuz an eneoù !
Ar bara glann a vuez } 2 w.
Zo hor magadurez. }

Enn hosti e kaver
Goad santel hor Zalver
E gorf sakr, e ene } 2 w.
Hag e zivinite. }

Ho Toue mad a zisken
Enn ho touez, tud kristen ;
It, breudeur an elez } 2
Da gaout ho levenez. }

Jezuz ! o va zenzor !
Jezuz ! me hoc'h ador !
Grit ma z'in d'ho kwelet, } 2 w.
Enn envou steredet. }

AR GOEL A ZISKENN

